




K
R
O
A

B
R
E
I
Z

EBREL 1949 12 PRIZ : 35 LUR

TAOLENN AN NIVERENN-MAN

War bez Hor Zalver (P. Guichou)	Pajenn	1
Goueliou ar Miz (An Tad)	—	3
Sanf Loeiz-Vari a Vontfort (Y. Tranvouez)	—	4
Pajenn an Emzao Katolik (L. Bleunven)	—	5
Eur ger diwarbenn Mikel an Nobletz (F. Gwegen)	—	6
Alleluia (Kanaouenn) (Loeiz Lok)	—	7
Korn ar vugale (Kerlann)	—	8
War an dachenn a vrezel (Kontadenn J. Seite)	—	9
Kroc'hen didoull (Tremazoig)	—	11.
Gwechall e Kerwenn (H. Greff)	—	12
Tenzor an Dintin goz (Ab'Sulio)	—	14
C'hoariou	—	16

Hent ar Groaz (F. Vallée).
Regina Coeli (Maodez Glanndour).

PRIZIOU :

Koumanant ordinal (eur bloaz)	350	lur
Koumanant a zikour	500	lur
Koumanant a enor	800	lur

Kas an arc'hant da : **M^r l'Abbé Laurent BLEUNVEN**
Recteur de **Plomelin**, par Quimper (Finistère)

Skrivit sklaer hoc'h anioù, mar plij

Koumanantit! Klaskit deomp koumananterien!

LAKIT EVEZ BRAS

1. Evit kement a zell ouz danvez-skrid ar gelaouenn : skriva da rener Kroaz Breiz : **Mr l'abbé Jean-François Falc'hun**, professeur au Grand Séminaire de Quimper (Finistère).

2. Evit kement a zell ouz Koumanantou ha profou, skriva da : **Mr l'abbé Laurent Bleunven**, recteur, Plomelin, par Quimper, (Finistère). C. C. P. 1266.53 Rennes, ha nann mui 21.802 evel araok.

REVUE MENSUELLE

Ar merour : **M. l'Abbé BLEUNVEN**
Recteur, PLOMELIN, par Quimper

Ti-Mouleriez Kreiz Breiz
36, Rue Richard-Lenoir, RENNES

LEORIEREZ SANT-KAOURINTIN

J. Guivarc'h *mak*

Straed Kereon, KEMPER

Téléph. 7-03



Levriou - skol

Pep tra evit ar skolidi
hag ar burevioù

Levriou - oferenn

Levriou - kan

Levraoueg

Poupées. Broderies

Le MINOR

Pont-Sabbé



Bretagne

Lans da Vicheriou ar Vro

Mark ar Berr "à la Ville d'Ys" (Ker-Is)

16, Boulevard Kerguelen (e-kichen ar Post). — KEMPER

Pour Tout
ce qui
concerne
la PHOTO

POUILLOT-EHANNO

PONT-L'ABBÉ Téléph. 1-21

ON SE DÉPLACE SUR DEMANDE

POMMES de TERRE - GRAINS - ENGRAIS - FOURRAGES

Alain PÉRON

57, Rue Ernest-Renan, PONT-L'ABBÉ (Finistère) — Téléphone 24



LIBRAIRIE LE DAULT

16 bis, Rue René-Madec - QUIMPER

LIVRES - GRAVURES - ANCIENS & MODERNES
Tout sur la Bretagne

Achat de Livres (et de vieilles reliures)
se rend sur place à ses frais

Chapellerie JEAN LE DRÉZEN

RUE JEAN-JACQUES-ROUSSEAU, PONT-L'ABBÉ

GANTS • CRAVATES • BAS • NOUVEAUTÉS

DÉCORATION, LITERIE, TISSUS D'AMEUBLEMENT

A. POUCH et Fils

TAPISSIERS
DÉCORATEURS

17, Rue Sainte-Thérèse, QUIMPER — Téléphone 11-60

ÉTABLISSEMENTS

Pierre CHANCERELLE

Conserves Alimentaires

(4 USINES EN BRETAGNE)

SIÈGE SOCIAL : QUIMPER



133633

War bez Hor Zalver

Eun testeni beo a berz eun den, eur beleg, hag en deus bet an eurvad da dremen eur pennad amzer er vro santelaet gant Hor Zalver : setu ar pezh hon eus ar blizadur da embann evit dudi lennerien Kroaz Breiz.

O TIREDET eus ar broiou pell warzu an Douar Zantel, en despet d'an trubuilhou ha d'ar skuisder, e treuz ar berc'hirined ar moriou gant eur galon laouen : soñjal a reont e kavint ahont, el lec'hioù santel, roudou fresk Hor Zalver. Soñjal a reont e c'hellint, hep ehan, pedi kalonek er peoc'h hag er sioulder, skuilh daelou didrouz war ar Menez Kalvar pe ar Bez sakr, dere'hel o spered stag hepken ouz soñj Jezuz...

Souezet bras e chomont p'en em gavont er Gêr zantel...

Kêr Jeruzalem, siouaz, n'eo mui bremañ evel e amzer Jezuz ! D'ar mare-ze, torgennig ar Golgota a oa er maez eus kêr, tostik d'eun Nor ; ar bez, roet gant Jozef a Arimati da zebelia ar Mestr, a oa en eul liorz, tregont paz bennak a-c'hano. Pell diouz an trouz, e c'hellas eta Mari-Madalen chom da leñva el liorzig-se, betek ma teuas Jezuz d'he gervel : " Maril... "

Hirio ne c'heller mui ober kement-se. Iliz-Veur ar Bez sakr, savet gant ar Groazidi, a zo kouls lavaret beuzet e kreiz kêr, e kreiz teñvala ha loua lodenn eus Jeruzalem.

Evit mont en Iliz, n'eus nemet eun nor... Dirazi, eun tamm plasenn ha ne bigner enni nemet dre eur straed striz, louz, karget a goz staliou, hag a zirioll o marc'hadourez betek kreiz ar straed. Ha pebeuz youc'h er straed-se ! evel ma ne vije nemet tud vouzar er vro ! Youc'hal a rank marc'hadourien ha prenerien araok en em glevet war ar priz ! Youc'hal a ra ar Vedouined, sounn ha reut war o azen, evit goulenñ plas. Youc'hal a ra ar mefe'hed, eur mell bec'h gant war o fenn, pa deu ar vugale diare'henn d'o bounta.

En Iliz, da vihana, e vo kavet eun tamm peoc'h ?

Siouaz adarre ! A-dreñv ar porched, e kavit dioustu dioualler an nor, eun diskib da Vahomed, mar plij, o varvailhat gant e vignoned... Hag e welit tud o vont hag o tont, kals anezo ken diskramailh eget ma vefent en eur c'hoc'hu : paotred ar Zav-heol ne blij ket dezo dere'hel pell o zeod a zav.

War ar marc'had, an Iliz Veur a zo rannet a dammou etre tri berc'henn : Tadou S. Frañsez o deus eul lodenn ; ar Greked, chismatiked, o deus eun all ; eben a zo etre daouarn Kopted an Abisini, chismatiked ivez... Setu e weler awechou tri ofis o tiroll asamblez, gant kanaouennou gwall zisheñvel dre o yez hag o zoniou.

A drugare Doue n'emañ mui Jezuz en e vez santel : arabat deomp e glask e touez ar re varo... N'eo ket ive kar roc'h ar Golgota eo deomp klask gwad prisius Hor Zalver

Karout a rafe koulskoude ar berc'hirined pedi kalonek el lec'hioù-se, er peoc'h hag er sioulder. " Me zoñje din gellout pedi amañ c'houekoc'h eget em bro, a lavare din eur vaouez eus ar C'hanada. Siouaz ! Keuz am eus da veza graet eur seurt beaj evit kement-mañ ! "

Arabat eo deomp avat fallgaloni... Hervez Lacordaire, " bez' ez eus eun den hag emañ ar garantez o veilha war e vez ! "

Tadou s. Frañsez, evit diouall gwir an Iliz katolik war ar Bez, o deus skuilhet kals gwad abaoue seiz kantved. A unan ganto, kals kristenien a zeu bemdez da veilha war ar relegou-ze, gant karantez birvidik ha doujañs gwirioù.

Na ped a zeu bemdez da zaoulina war Roc'h ar Golgota, en eur japelig klozet en Iliz-Veur, tost d'ar Porched. Daouzek pe bemzek troatad eo uheloc'h ar C'halvar eget leurenn an Iliz. Eus roc'h ar Groaz, ne jom dizolo nemet eun dachennig, dindan eun Aoter savet e kreiz ar japel, ha dalc'het gant ar Greked. Er maen, e vez gwelet eun toullig, an toull e-lec'h ma voe sanket troad ar Groaz, war a-lavarer. Tro-dro, skeudennou ha kleuzeurioù : traou didalvez ! Met n'eus forz ! N'eo ket traou kaer eo a glasker amañ, met eur roc'h hepken, eur roc'h bet sakret gant Gwad prisius Hor Zalver, gant daelbou ar Werc'hez ha Mari-Madelen, glet ive gant daelioù puilh kristenien niverus ha pec'herien bras leun a c'hlae'har. Na pebeuz dudi evit eun ene, deiz Gwener ar Groaz, pa vez kanet Aviel ar Basion er japelig teñval-ze, ha pa zaouliner holl asamblez war ar Roc'h santel : amañ eo e varvas Doue evidomp holl, evidoun-me, pec'her paour !

Goudeze, e c'hellomp adarre diskenn en Iliz, rak en he c'hreiz, tregont paz pelloc'h, eo emañ ar Bez santel, kuzet en eur savadur mein.


Eomp da genta er Gambrig, e lec'h m'oa azezet an daou Ael, da vintin Pask : leuniet mat e vez gant pemp pe c'houec'h den... Dre eun toull izel, stanket gant eur maen-milin goude ma voe sebliet Jezuz, eomp bremañ e diabarz ar bez, toull et roc'h : n'eo nemet eur riboull striz a hed eur skaonvaen, ar skaon m'eo bet astennet korf Jezuz warni er Bez. Bihan eo ar riboull, ken ma c'hell a-vec'h degemer eur beleg hag eur c'hurust evit an oferenn... Met peger c'houek n'eo ket lavaret pe glevet an oferenn war Bez ar Merzer bras, ha reseo amañ Korf santel Hor Zalver, bet astennet tri devez war ar maen yen-mañ !

D'ar pardaez ivez, eo doue chom er Bez da bedi, en eur zoniñ en abardaez ma voe degaset ennañ, dre zaouarn e Vamm glae'har hag e vignoned feal, korf mac'hagnet Hor Zalver hag Hon Doue.

Ya, daoust d'an trouz, daoust d'an dud dizoniñ pe difeiz, e-vezer digollet mat eus holl skuisder ha trubuilhou eur veaj hir...

A nebeudou, ne glever mui trouz ebet ken, ne reer mui an ouz netra na den ebet, dre ma stag karantez hor c'halon gristen da veilha war Bez Salver ar bed.

Per GUICHOU.



★ Gouelioù ar Miz ★

1 EBREL, GWENER KENTA AR MIZ. — Epad ar miz-mañ hor bezo tro da lenn ar Basion ha da gompren gwelloc'h pegement he deus ar Galon-Zakr hor c'haret. Rentomp dezi karantez evit karantez, ha renomp eur vuhez santel.

3 EBREL : SUL AR BASION. — "Ar Juzevien a gemeras mein da stlepel ouz Jezuz"... Hirio ez eus ivez eun niver bras a dud hag o deus kasoni ouz Hor Zalver, ouz e Iliz, e veleien, e ziskibien. Ra gavo da vihana frealzidigez ganeomp-ni.

5 EBREL : MEURZ, SANT VISANT FERRIER. — Ar zant bras-mañ a voe ganet er Spagn; met goude beza aet e urz sant Dominik, e teuas da brezeg e Breiz; mervel a reas e Gwened. N'eus ket bet par dezañ evit degas soñj d'an dud eus deiz bras ar varn.

10 EBREL : SUL AR BLEUNIOU. — "Hosanna da Vab David"... Ar Juzevien a zo war nes lakaat Jezuz d'ar maro. Lennomp e Basion gant doujañs; kasomp dezañ meuleudiou entanet, hag, evel hon tud koz, lakomp eur bodig lore a zloc'h kroaz hon ti evit kaout soñj eus an deiz bras-mañ ha tenna warnomp bennoz an Aotrou Doue.

11 EBREL : LUN ZANTEL. — "Lezet am eus va c'horf gant ar re a skoe warnañ". Ni avat, diskouezomp da Jezuz truez, doujañs ha karantez. A-hed ar zizun-mañ, deomp d'an ofisou ar muia ma c'hellimp, ha soñjomp ervat er poanioù mantrus en deus gouzañvet Hor Zalver evidomp.

13 EBREL : MERC'HER SANTEL. — "Goulet eo bet abalamour d'hor fallagriez, bruzinet eo bet abalamour d'hon torfejou"... Evit rapari ar boan hon eus graet d'hor Zalver gant ar fallagriez hag an torfejou-ze, gouzañvomp hiviziken a galon vat kement tra hor bezo da c'houzañv.

14 EBREL : YAOU-GAMBRIID. — "Goude beza kaset an dud a-hed e vuhez, Jezuz a gasas anezo betek ar fin"... hag evit chom ganeomp betek fin ar bed, e savas Sakramant an Aoter. Enor ha karantez dezañ en e Zakramant meulet ra vezó !

15 EBREL : GWENER AR GROAZ. — "Jezuz en deus santel betek ar maro... ha ar maro war ar groaz"... Sellomp alies ouz Hor Zalver stag ouz ar groaz; ha ni ivez, eveltan ha dre garantez evitañ, dougomp hor c'hroaz gant nerz-kalon.

16 EBREL : SADORN ZANTEL. — "Klasket bremañ traou an neñ, e lec'h

m'emañ ar C'hrist azezet en tu dehou da Zeue"... Jezuz en deus trec'het war ar maro ha war Zatan, digoret en deus deomp dor ar baradoz. Bezomp laouen eta, hag e-lec'h staga hor c'halon ouz traou didalvez ar bed-mañ, soñjomp dreist pep tra e madou hag e euredist dispar ar baradoz.

17 EBREL : SUL FASK. — "Alleluia, savet eo Jezuz a varo da veol"... An deiz-mañ eo evit an holl gristenien, deiz bras al levez. Lavaromp bennoz da Jezuz da veza hon dasprenet; tostaomp ouz an Daol zantel gant eur garantez virvidik ha pedomp evit ar bec'herien geiz, evit ma tistroint niverus ouz an aotrou Doue epad amzer Fask.

24 EBREL : SUL AR C'HASIMODO. — "Va Aotrou ha va Doue"... eme Sant Tomaz da Jezuz. Lavaromp ivez alies ar ger-ze; bezomp atao fidel da Jezuz, hor Zalver; ha diskouezomp dezañ hor c'harantez, n'eo ket hepken dre hor c'homzou, met dreist-holl dre hon oberou.

An TAD.

KORN AR MEROUR

Lennerien ger

Emaomp, hep dale, e hanter ar bloaz hag ez eus c'hoaz eur bernig mat ac'hanoc'h ha n'o deus ket degaset d'eomp priz o c'houmanant evit 1949. Allo, allo, poent eo d'an dilerc'hidi ober eur skoulen en o mouchouar evit ma ne zizonjint ket mont d'ar post er c'henta amzer.

Exomm hor beus da c'houzout piau a zo a du ganeomp evit gouzout da belec'h mont.

Hag eta ar re na fell ket d'ezo reseo mui ar gelaouenn a zo pedet da skriva war ar golo "REFUSE" ha d'he rei en dro d'ar fañter.

Ra zalc'hint soni koulskoude eo pell zo e tlen beza graet kement-se. An niverennou, bet kaset d'ezo, abaoe penn kenta ar bloaz a zo kousket ker d'eomp. Goulenn a reomp diganto kaout ar vadelez da rei eun dra bennak eyto, mar plij i.

Niverenn miz C'houeyrer, siouaz, a zo bet tennet re nebeut anezhañ da dre zleueztad ar vouterez meur a hini eus hor mignoned a zo atao ouz he gortoz.

Ma ve unan bennak ac'hanoc'h o defe resevet diou, pe ne rafent netra gant o niverenn, o fedomp d'he digas d'eomp.

Bennoz Doue d'eoc'h en a-raok.

SANT LOEIZ-VARI A VONFORT

Kendalc'h

SANT LOEIZ-VARI e kloerdi SANT SULPIS (PARIS).

Ouspenn e garg eus al levraoueg, Loeiz-Vari en devoe c'hoaz eur garg all : an hini d'ober katekiz d'ar vugale ailhona eus parrez Sant Germain, ha da lakizien karter Sant Sulpis. Eul labour gwall ziaes e oa da ober : Loeiz-Vari a deuas ker brao a benn anezañ ma ne c'helle ket e genvreudeur her c'hompren.

Ar re-mañ a c'hoanteas, eun devez, kaout eun taol c'hoarzin diwar goust Loeiz-Vari. Dont a rejont en Iliz, da guzat, o c'hortoz ar c'hatekiz... Ha setu Montfort o kregi da gomz dirazo eus ar maro, ar varn, an ifern, en eun doare ker c'houek ma ouelas an holl, kloareged hag all.

Souezi a ray c'hoaz anezo e meur a zoare. Mar deo eur zant o veva hep ehan gant Doue hag ar Werc'hez, Loeiz-Vari a zo ivez ampart war draou an douar, ha skiant-prena en deus.

Eur wech e sav ano er C'hloerdi eo en em lakêt Loeiz-Vari da skriva barzonégou : ha c'hoarz gant an holl ! Penaos e c'helle eun den evel hennez en em emell da zével gwerzioù, pa pe-seurt gwerzioù e tleont beza ! Ar c'hoaperien a rankas kila eur wech muioù : ar c'hantikou savet neuze gant Montfort a zo leun a skiant, atao talvoudus evit an eneoù, hag alies kaer meurbet. Loeiz-Vari a garo hag a ouezo atao kana Doue hag ar Werc'hez gant kalon ha teneridigez.

Poania a reas ivez da lakaat e genvreudeur d'o c'haret, d'o zervija en doare ar gwella. Emañ o paouez Jenn levr an aotrou Bondon : " Ar sklavelez da Vamm Doue ", a ro ali d'an den da lakaat pep tra a zo en e c'hal-loud etre daouarn ar Werc'hez, evit ma vezint gwelloc'h a-ze etre daouarn Doue. Loeiz-Vari, da genta, en em rojo evelse da sklav a garantez d'ar Werc'hez, e " Vamm vat ", ha, gant aotre renerien ar c'hloerdi, e teu da veza kerkent abostol ar " Sklavelez santel " (1).

Loeiz-Vari a oa abostoler pa voc dibabet, er bloavezh, 1699, evit mont

da bardona da Chartres gant eur c'hloareg all, e ano ar c'hloerdi... Beaji a reas an daou berc'hirinad en eur bedi a spered, en eur lavaret ar chapelled pe ar breviel. Ahendall, ger ebet kouls lavaret, nemet evit lakaat an dud a gavent war o hent da zoñjal e Doue hag ar Werc'hez. Rak Loeiz-Vari n'eo ket evit miret da brezeg d'an holl war an hent. Al labourerien a oa a-zevri gant an eost, hag ar Zant a c'houlenne outo kinnig o foan da Zoue evit ma talvezfe d'o ene. D'ar vugale e komze eus Doue hag ar Werc'hez, ar zakramañchou a dient degemer... Setu an tad Montfort e teid an neudenn : heñvel e chomo a-hed e vuhez : betek en desped dezañ e rank prezeg.

Kement emañ ivez emañ an ezomm da veva e unan penn, da dremen e amzer er bedenn ; setu perak, a-vec'h degouezet e Chartres, emañ en Iliz-Veur, daoulinet dirak skeudenn ar Werc'hez. Poan a vezo o sach a nezañ er maez eur pennadig, amzer da gemer e bred.

Ha setu, en diwez, eur goulou-deiz nevez o para war buhez Loeiz-Vari. Seiz vloaz a zo abaoe m'en deus dilezet kêr-benn Vreiz, seiz vloaz tremenet en anken hag en drubuilh hervez kredenn ar bed, er brasa eurusted avat hervez e zoñj dezañ. Lavaret en doa kenavo d'e dud, d'e vro, d'ar bed... Loeiz n'eo mui eun den evel ar re all : prest eo da glevet Doue o lavaret dezañ dre vouez e renerien : " Sav uheloc'h ! "

D'ar 5 a viz mezeven 1700, ez eo beleget gant an aotrou 'n Eskob de Flamenille, ha goude tri devez retred, hervez boaz an amzer, e voe gwelet " eun Ael o sevel ouz an Aoter ".

(Da gendere'hel).

Y. TRANVOUEZ. S. M. M.

(1) Mar deo bet anvet an Tad Montfort abostol ar Werc'hez, eo abalamour m'en deus prezeget eun doare a zoujañs en he c'henver, anvet " Sklavelez santel ". N'eo ket heñ en deus ijinet ar Sklavelez, peil ac'hano. Met kemeret en deus ar renk kenta e tontez ar re a gomz eus an devozionez ; ouzpenn, prezeget en deus anezi e pep lec'h. Betek e amzer dezañ avat, neoanemet hiniennoù oc'h anaout anezi.

PAJENN AN EMZAO KATOLIK AR ZUL, DEVEZ AR SPERED

DEGOUZET eo bet ganeoc'h meur a wech, mont en hent da zul vintin, mintin mat. Pebeuz laouenedigez n'eo ket evit ar galon klevet, en eun taol, ar c'hleier, kleier bihan ha kleier bras ar parrezioù tos'a, o tihuna, oc'h en em lakaat e bole hag o teurel a bep tu bom-mou lizhin o c'hanaouenn !

O mouez, dougennet war diouaskell an avel, a ya betek an tiez pella da embann d'an dud ar c'helou eurus, an nevezenti bras, eo goulouet ar zul, devez an Aotrou, hag o deus, en *deiz-se*, da veva *eur vuhez nevez*, da veva evit an neñv.

Abaoe ar zul-Fask kenta, p'en deus Hor Zulver, o tont beo eus ar bez, diskaret galloud ar pec'hed da digoret deomp dor ar vuhez padus, an den n'eo ket galvet hepen da veva evit an douar : bez' en deus en neñv eur gêr e-lec'h m'emañ ar C'hrist ouz e c'hortoz. Galvet eo da veva gant Doue evit an holl-viskoaz, da gana e veuleudiou, da azeza ouz e daol, da ziskuiza war e galon er baradoz.

Goude beza bet dalc'het gant traou an douar epad c'houec'h devez, goude beza bet dindan samm pounner al labour tenn, lavarit din petra c'hell beza gwelloc'h d'an den paour, da zul, eget nijal eur pennadig war-zu e wir vro, tañva eus al levenez a zo miret eno evitañ, deski ober a-vremañ ar pez a dle ober, da viken, e ti an Aotrou Doue ?

Koulskoude, ma tle an den beva, bep zul, eus e vuhez a Vab-Doue, eo e zever ivez, en *deiz-se*, beva eus e vuhez a vaden. Ha petra eo ar vuhez-se ma n'eo ket e vuhez a spered hag a galon !

Er miz diweza, am eus bet tro da lavaret penaos e vever, da zul, eus *buhez ar galon* : bez' ez eo c'hom muioù, en *deiz-se*, gant ar re a garer, azeza ouz ar memes taol ganto, kemeret perz en o joa pe en o dienez...

Met da zul ive eo e tle an den beva dreist pep tra eus *buhez e spered*, e spered graet evit en em zigeri, en em vaga gant ar pez a zo mat, ar pez a zo gwir, ar pez a zo kaer. Spered paour, hag a jom ken alies, siouaz, sarret hag hanter zounnet, pa ne vez ket gounezet a-grenn gant gevier ha gened touellus ar bed.

Lezit eur park dilabour, hag abarz pell ne welot o sevel emañ nemet louzrier fall, drez ha spenn... Ma n'oc'h ket aketus da zoursial ouz ho spered, d'e *zigeri*, d'e

wellaat, d'e *vaga*, e c'hoarvezo gantañ ar memes tra. Ar spered a zo bet roet deomp evit reizha ervat hor buhez, ha kompren gwelloc'h oberou Doue : kement tra eta a c'hell e zigeri, e ledanaat da varn eeunoc'h an traou, a zo eul labour eus an talvoudusa da veza graet da zul.

Diskuiza, ne dle ket beza evidomp chom d'ober netra. An amzer vak roet deomp da zul, ni a dle gouzout he implija en doare ar plijusa evit hor mad ha mad ar re a vev en dro deomp.

Epad ar zizun, pa vever krog el labour, ne vez nemeur a amzer da jompell da lenn. Ma teu ar gazetenn bemdez betek an ti, ne vo sellet nemet ouz ar c'hleier brasa. Perak ne lakafemp ket a gostez ar pennadoù a zo enno muioù a gelenadurez, muioù a voued-spered, a gav-jemp a-benn ar zul ? An den, hirio, daoust pehini eo e stad, en deus ezomm da c'houzout lenn a draou kement war dachenn e relijion eget war dachenn e vicher. Mar deo dereat evit ar c'haisten, da zul, maga e spered, da genta, gant gwirionezioù ar feiz, n'eo ket difennet outañ kennebeut, tamm ebet, pleustri war ar pez en deus ezomm da anaout evit beza *barrekoc'h en e stad pe en e vicher*.

Doue a zo fellet gantañ e vefe ar zul e zevez, mel ivez hon hini deomp-ni. Goude beza graet an deverioù ouz Doue, e c'heller eta da zul, mont eus ar gêr *da bourmen*, evit anaout gwelloc'h doare ar vro, gwelet ar pec'h a vez graet amañ hag ahont... Ha n'eo ket o sellet a-dost ouz leor bras ar bed, digor dirazañ, eo e pak an den fûr an deskadurez talvoudusa ? Gwelet an traou kaer graet gant ar C'hrouer, ar re ive graet gant an dud, ne c'hell nemet rei tro deomp da veuli an Aotrou Doue ha da veza desketoc'h war ar skiañchou hon eus ezomm da anaout.

Bezomp eus an dud-se hag a glask, *bep sul*, *pinvidikaat o spered* gant ar pez a zoñjont pe a welont, a glevont hag a lennont.

O sul benniget, piou lavarou awalc'h an holl vad a dalvezfec'h deomp ma oufemp ober gwelloc'h implij ac'hanaout ?

L. BLEUNVEN.

Eur ger diwar benn Mikel an Nobletz 1577 1652

Kendalc'h

F) MIKEL e KONK-LEON : ar bloa-
vezioù diweza hag ar maro.

Dom Mikel en deus 63 vloaz. Skuiz maro eo da heul e binijennou hag e labourou; met ken birvidik eo chomet e aked. Kendere'hel a ra da brezeg, da goves ha d'ober katekiz e parrezioù Bro-Leon izela. "Ar c'hatekiz, emezañ alies, ar prezeg hag ar c'hoves eo an teir jadenn aour a dap hag a stag an eneou." Blenia a ra e-unan etun emzivadeg paour ha dizesk Jann ar Gall, evit ober anezi eur gategizerez dispar.

Gervel a ra en e gichen an Tad Maner, evit rei dezañ e daolennou, e baperou hag e reolennou. Rei a ra dezan an ali da dremen dre Zouarnenez, Eusa ha Molenez, ha da drei e gwerzioù brasa gwirionezioù ar c'hatekiz, hag ive d'ober prosesionou eus an dibab evit kloza pep mision.

Ar c'hleñved a ro dezañ lamm. Daoust da-ze e kendalc'h d'ober katekiz d'ar vugale bodet en dro d'e wele.

Pa wel ar maro o tostaat, e ped Sant Kaourantin, hag e c'houlenn digant Doue perz e poanioù ar Basion. Kounnari a ra an diaoul, met ar Werc'hez Vari a gennerz he servijer. Hemañ a bourchas e ene da zegemer ar zakramañchou diweza : dirak korf santel Hor Zalver, e c'houlenn beza lakaet war e zaoulin, hag e ro da anaout an donezon bet digant Mamm Doue, 52 vloaz kentoc'h. E giz m'en doa kemennet, e c'houzanvas hep klemm teir anken skrijus, ha, d'ar zul 5 a viz mae 1652, e roas e ene kaer da Zoue.

Pa voe digoret e destamant, e voe gouezet en doa lezet gant e herien "eun netra brao en eur c'houfr".

Burzudou dreist niver a c'hoarvezas war e vez : e 1666, e konted ouspenn 200 anezo. An aotrou du Louët, eskob Kemper, pareet dre skoazell Dom Mikel epad eur weladenn en ti m'oa bet Dom Mikel o c'hom ennañ e Douarnenez, a gemennas sevel en enor da Zant Mikel Arc'hel, eur japel, hirio c'hoaz en he sav, hag e resever enni bepred grasou kaer dre bedi ar misioner santel.

Kement all a c'heller da lavaret diwar benn ar japeligoù savet e Plougerne, e Konk-Leon; lec'h m'edo e di, ha diwarbenn ar bez a wele e iliz ar barrez-mañ.

Peur e vo laket Dom Mikel e renk an dud enorus?

D'an 30 a viz here 1888, war c'houleni an aotrou Linguinou, an aotrou 'n Eskob Lamarche a zavas al lezvarn da studia buhez Dom Mikel.

E 1896, an aotrou Herle Kerisit a gemer plas an aotrou Linguinou, aet d'ar bed all. D'ar 6 a viz ebrel 1897, ar Pab Leon XIII a roas aotre da welet ha santel oa Dom Mikel an Nobletz.

D'ar 14 a viz kerzu 1913, e voe embannet e vertuzioù dispar dirak an Aotrou 'n Eskob Duparc, laouen bras o trugarekaat ar Pab Pi X. E derou ar bloaz warlerc'h, eul lizer a berz an Aotrou 'n Eskob a embanne ar c'helour mat d'an eskobti a bez.

Ha bremañ, petra da ober?

Ober pinijenn ha pedi Doue, da lakaat da vleunia an daou vuzud a zo ret evit ma vezo savet Dom Mikel e renk an dud enorus.

Ar pedennou-ze a vezo graet gant seul vujo'h a dan ma vezo gwelloc'h anavezet gant ar veleien ha gant an dud fidel, buhez ha vertuzioù servijer Doue.

F. GWEGEN.

Eun aneval marlonk

An avalaouer (Hérissou) a zebr, atao epad an noz, eur benn traou : amprevaned, preñved, melc'houad... pa ne gav ket gwelloc'h. P'en devez tro, e tebr ive laboused, yer, lapined... Gwelet ez eus bet zoken eur vamm-avalaouer o tebri he hini bihan.

An avalaouer ne c'hell ket beza bini-met : n'eus forz peseurt binim rei dezañ, ne ra van ebet. En em ganna a c'hell ouz an naered ha beza flemmet ganto, hep an distera droug evit e yec'hed.

ALLÉLUIA !...

Allegro 26 Diskan

Re-su-si-tel ez eo Je-sus, Al-le-lui-a A-le-lui-a Warzu an
neñv ka-nomp joa-i-us, A-le-lui-a A-le-lui-a. Sonit pell so-nit kaer
klei-er bras ha bi-han; Dre be-var c'horn ar bed d'ar che-lou grit em-bann
Je-zuz a oa ma-ro ma-ro a se-be-liet E gorf di-rak tes-tou er bez
'voe dis-ken-nel di-rak tes-tou Je sus gou-de an tri-de-vez
a zo beo a-dar-re; e-mañ leun a vu-hez. Re-su-si-

Diskan.

Resusitet ez eo Jezuz. Alleluia, alleluia.
Warzu an neñv kanomp joaius : alleluia, alleluia.

I (Holl)

Sonit pell, sonit kaer, kleier bras ha bihan;
dre bevar c'horn ar bed, d'ar c'helou grit embann :
Jezuz a oa maro, maro ha sebeliet;
e gorf, dirak testou, er bez 'voe diskennet.
Dirak testou, Jezuz goude an tri devez,
a zo beo adarre : emañ leun a vuhez.

II (Paotred)

Grit embann d'ar c'helou, kleier bras ha bihan;
sonit alleluia, pell ha kaer, hep ehan,
rak ar burzud 'zo bras dreist an holl vuzudou.
Betek hen n'ho peus bet da zeni seurt kelou :
her roit da glevet dre bevar c'horn ar bed,
d'ar re a oa war c'hed, d'ar re na gredint ket.

III (Merc'hed)

A viskoaz ez eus bet, ez eus meur a Domaz,
a glevas gant e skouarn, a galon a nac'has
edo goullto ar bez, Jezuz trec'h d'ar maro.
E welet, touch outañ : ahendall i 'nac'ho.
Kerkent ha son ar c'hloc'h, kals eveldomp ive
a zaouline laouen : "Va Mestr ha va Doue".

IV (Holl)

Resusitet ez eo : emañ Doue ganeomp.
Ra jomo, kristenien, peoc'h Jezuz c'hoump.
Ma reomp an hent gantañ, tomm e vo d'hor c'halon;
berr e vo an amzer, bale c'hellimp dizaon,
sur d'en em gaout, eun deiz, e gloar ar Baradoz.
Kanomp alleluia, va breudeur, da c'hortoz.

KORN AR VUGALE

KENDALC'H

Tadou, mammou, deski'ta d'ho pugaie :

En eur wiska e roched d'eur c'hrou-adur :

Vi bihan war ar pont.
Da Bont'n Abbad e rankan mont,
da gerc'het butun da va contr,
eur zae ruz, eur zae c'hlas,
va Yannig bihan zo en noaz!

Da lakaat ar bugel da devel :

Selaou, selaou!
En tu all 'meur o laza laou.
Selaou, selaou c'hoaz :
En tu all 'meur o foeta toaz.

Pe c'hoaz :

Me 'm eus gwelet e Pont-Paol
daou gi du o planta kaol,
al louarn oc'h arat,
ar yer o pigellat,
an houldi dorn-ha-dorn
o kas an toaz d'an ti forn.

Hag ivez :

Mari-Janig a blij din :
kals a labour a ra din :
goro ar zaout, o c'has er maez,
hag o skuilha din va laez!

Da lakaat da lammat :

Dañs Yann gant e zac'h lann.
Dañs Per gant e zac'h ler.
Dañs Paol gant e zac'h kaol!

D'ober goap, pa fich ar baniel, er maez eus ar bragou bihan.

Ker an amann 'barz Kore,
Deut an doal war c'horre!

Da luskellat (kanet e vez),

Toutou, bihanig.
Ha me a gano dit,
da c'hortoz da vammig
da rei bronnig dit.
Da vamm a zo dañserez,
da dad a zo mezvier.
Hag e vo pell, bihanig,
ken na deufont d'ar gèr!
Toutou, bihanig... (hag all)
da rei bronnig dit.

Pe c'hoaz :

Al logodennig vihan
e peseurt toull emañ?
En toull-mañ pe en toull all?
Aet ebioù gant eun all!

Hag ivez :

Pim! Paoñ!
Ar c'had d'an traoñ!
An ibil a-dreuz,
an tenn er c'hleuz!

Re all :

Va breur Jakez, va breur Jakez,
Kousket out? Kousket out?
Sonit 'ta, sonerien.
Dañsit, pilhaouerien!
Bimbalaouñ.
Bimbalaouñ!

'Peus ket gwelet Jañ-Pi
e diskenn an Dour-Du,
e roched er maez e vragou,
dibrenn en daou du?
Ha me lavaret dezañ :
Deus amañ, Jan-Pi kaez,
Ma prennin dit da vragou,
Da roched zo deuet er maez.

Azen kornek, kae d'ar skol,
'mañ ar vaz e toull an nor.
-O nann, me ne dapin ket,
rak me vo er skol abred.

Marivonig a zo koant,
hag he deus bleo melen.
Dime'i ganti me 'm eus c'hoant :
Setu va flanedenn.

Petra vo da zijuni?

— Soubenn an druzoni.

Petra vo da lein?

— Soubenn ar c'hig melen.

Petra vo da goan?

— Soubenn ar c'hig moan.

Fri louz,

'Lak an dud d'ober trouz.

Fri mec'hi,

'Lak an dud da bec'hi.

KERLANN.

WAR AN DACHENN A VREZEL

KONTADENN J. SEITE

Ar mor a dan hag a luc'hed, tarzet gant eun nerz diaoulek evel eur gorventenn foll, a ya kuit nebeut-ha-nebeut. Ar c'hanol, a groze bremaik, a zo sioul bremañ. Koulskoude an dachenn, reuglet ha mac'hagnet gant an obusiou kouezet warni, a jom c'hoaz da virvi, mor kounnaret, gant gwagennoù hep lusk na dilusk. Daoust d'ar gorventenn da veza chomet a zav krenn, an dismantr, a jom warlerc'h an drailh, a ziskouez dremm heuzus hag iskiz ar brezel milliget.

Ar gwagennoù ne luskellont mui. O c'hribenn, gourdrouzus bremaik, ne freuz mui an ero a zo a bep tu, ero an tremenvan evit kals soudarded, a lez o huanadenn ziweza epad ma sav en o c'hichen betek o gelei, galv strafuilhus ar re o deus c'hoaz esperañs ar vuhez.

En eur foz kleuzet gant an obuzioù, e tigor Yann-Vari e zaoulagad, daoulagad glaz gant malvennoù melen. Serr-noz eo.

Douaret betek e skoazioù dindan an douar dizac'het warnañ, emañ a stok-korf, e zremm troet warzu an neñv, evel pa vefe o c'hortoz ac'hano ar varn ziweza.

Sellet a ra, hag e wel neuze kement a stered en noz du ma kred beza bet taolet en eun islonk. Santout a ra an avel fresk o tremen war e zremm, gleb gant an derzienn. C'houez kreñv ar pri a zeu betek e fronellou. Bremañ hepken, gant anken, e taol evez ouz e gorf krapet gant an douar : seblantout a ra dezañ kaout eur menez o flastra e vruched.

Eur glemmadenn druezus a zeu a vec'h er maez eus e gornailhenn dizac'het, met evit mervel eno, hep gellout dont zoken betek e vuzellou. " N'am eus nerz c'bet ken, emezañ; arabat din en em skuiza : gedomp ar gedour-noz. "

War evez, e kreiz sioulder an noz, e talc'h e zaoulagad troet warzu an neñv. En dro dezañ, an deñvalijenn a jom difiñv, hep mouez, hep trouz. Prestik, ar stered en em lak da grena, a-us dezañ, da zañsal, evel m'o dije c'hoant da ziskenn betek ennañ, dre druez outañ. En eun taol, unan anezo en em zistak eus ar volz teñval ha a deu da goueza en toull m'emañ-heñ; war he lerc'h, setu eun all, djou, teir... Erfin, e lugernont holl, stok ouz e zremm, ken tost, ken skedus ma rank serra e zaoulagad.

Hag e soñj neuze kousket; met gant an derzienn e teu dezañ eun huñvre.

Soudarded bihan a red en e raok, war e lerc'h, a bep tu dezañ. Heñ ive a ya diwar herr war araok. E dreid a stok a-vec'h en douar. Youc'hadennoù a zav a bep tu. Tar ha luc'hed a red en o zouez gant eun trouz ifern : koueza a ra meur a hini. Yann ne c'hell ket o c'honta.

Sell, penaos e kouezont! Unan en deus digoret e zivrec'h evel m'en defe c'hoant da vriata an douar; eun all en em daolet war e gein, eeun tenn evel eur blanken. Lod all a zeblant azeza, dinerz, o fenn stouet war o bruched, hag o daoulagad o sellet ouz ar c'houer ruz a red dindano...

Eur mell lamm : setu Yann e foz an enebour! Met goudeze... eun trouz spontus, eul luc'hedenn, hag an aer a voudinell epad hir amzer en dro dezañ. Goude, Yann n'en deus soñj eus netra mui, nemet eus e zihun bremaik, en eur bez digor...

Digeri a ra adarre e zaoulagad. Teñvalijenn an noz a deuz nebeut-ha-nebeut; ar stered a gerz pell, du-hont, en neñv.

" Pa vo deiz, emezañ, e teuint d'am c'herc'het. "

An Douar panez

ADALEK miz meurzh oc'h echui, setu al labourou bras o tigeri. Hiziken e vo ret en em zikour, muioc'h c'hoaz eget araok : pep tiegez n'en deus ket ar pezh a zo ret evit kas da benn al labourou-ze : douar bouet-loened, foenn, east... Emgleo a vezo graet eta gant an " amezeg kenta ", a zo evel kerent; ouz ret, gant amezeien all. Tud ha loened a vezo damvoutin war ar poent-mañ.

An deveziad kenta a zo er Gerwenn, gant pevar a dud diavaez-hepken : Cheun ha Jañ-Mar a deu eus Penwern, Yvon ha Paol eus eun tu all. Evit eun devez e c'heller atao diouer eun den e pep tiegez. Pa vez kals bugale, unan a ya alies da vevel pe da blac'h o c'hedal an dimezi... Deski a reont o micher, bevañz ha lojeiz o deus hag eun tamm koumanant war ar marc'had : troidellou dek gwenneg diouz an deiz, daou-c'hant-hanter diouz ar bloaz.

Jañ-Mar a grog en alar. N'eo ket barrek-barrek, met kredi a ra beza ar maout. Ha ne blij ket dezañ ober netra all. Cheun, eur jikenn e korn e c'hennou, a zo erruet gant ar bal war e skoaz, evit terri ar pennou. Netra da ober evit lakaat anezañ e lec'h all : aon en deus rak ar c'hezeg, ha ganet eo da zadorn goude al labour graet.

Tud all a zo, aesoc'h da embregi. Eur paotr seder a grog er siblou da gas an daou loan da Jañ-Mar. Hag en hent! Eur vaouez, gant eur forc'h, a ya da heul evit karzprennat, gant aon na deufe an teil — teo eo ar gwiskad — da vernia dirak ar gontel ha da stanka... Dale a vefe, ha Jañ-Mar, droug ennan, a c'hellfe mouzat!

Warlerc'h an alar bihan o kignat, an tumber, sachet gant tri loan, a ya en douar betek al laz, o sevel douar melen war ar park. Ar walenn-sparl he devezo bec'h hirio! Ar panez avat a gavo evelse pep aezamant evit sanko doun o gwrizioù, hag an doureier a zilo brao en douar andounet bep tri pe bevar bloaz.

E pep penn d'an ero, eur gwaz a echu al labour gant e bal. Ar c'hezeg

ne c'hellont ket kas an eler betek an dalar, rak ar c'hleuziadou keuneut a deu lark war an douar, hag ar zugellou a zo hir. Diwallomp na yafe eul loan e gaou : an hini yell he deus hillig evel kals eus ar c'hezegenned. War eun taol e giz-se, warlene, oant aet d'an daou lamm, o truilha ar paotr-Cheun, a voe troc'het eun tamm eus e feskenn gant ar zouc'h.

Ar pengenn troet a ya war ledanaat. Al laboused, piked, kegined hag all, a gabal da zastum ar preñved hag amprevaned a bep seurt dizolot gant ar bomm.

Wardro nav eur, Soaz a deu d'ar park gant ar c'hortozenn : ar pod war he fenn, drant ha seder, eur baner ouz pep dorn. Ar butun n'eo ket ankoñ-nac'haet : eur pakad a zek gwenneg, da ranna etre an daou pe dri o deus c'hoant d'ober moged. Tenna a raint d'ar plouz berr da welet piou en devezo ar c'horn pri " Job " roet war ar marc'had gant an ostizez... Muioc'h 'zo lakaet a garrod, rak niverusoc'h eo ar jikerien.

Meur a hini, ha Per da genta, ne reont implij ebet a vutun.

" Pa zono an Anjelus, eme Soaz, e vo poent dont d'ar gêr! "

Taolomp evez bremañ evit echui ar pengenn a zoare : amañ e vo gwelet piou a zo gouest. Ar foz a dle beza eeun ha striz : paotr an alar hag hini an tumber a rank eta beza barrek o daou.

Evit sur, poan a gemeront. Hogen ar boan hag an nerz n'int ket awalc'h : ijin a zo ret ouspenn.

— " Eeun-tenn eo " ? a c'houlenn Jañ-Mar, o sec'hi e dal gant e gildorn...

— " Ya da! Evel va brec'h pa vezan o c'houeza va fri ", a respont eur goapaer, hep damant da ourgouilh egile.

Ouz ret, ar zouc'h a vezo lemmet er c'hovell : daou wenneg a goust. Met, pa vez al loan da houarna, ar goveller

a gemer hepken eur skoed, priz ar pevar houarn : pisa ar zouc'h a zo war ar marc'had.

Ouz taol hirio, bec'h d'ar c'hig-hafars. Seurt pred a vez da veurz, da yaou ha da zul... hag hiziken, d'an deveziou bras. Naon o deus an dud, ha mat e kavont ar geustereun :

" ar gwella bara da zebri
a vez gounezet en eur c'houezi! "

Ar boan a zo bihanaet kals avat, hervez Per. N'eus ket pell, ne oa tumber ebet : neuze e veze palaret. Pa oan yaouank, ne oa zoken alar houarn ebet : n'am eus morse labourer gant eur seurt alar. Bet oun avat alies o trei parkeier evit douar panez gant ar bal penn-da-benn. Neuze e oa kanfartet kreñv evel marc'h.

Difazi e sav kaoz an dud a zo bet brudet dre o nerz... en eur astenn o galloud eur meutad bep taol. Da skouer :

Ar " Gouriner " a oa brudet da bell evit e nerz souezus. Edo en e bark oc'h arat, pa deuas tri den a zoare da c'houlenn : " E pelec'h emañ ti ar Gouriner? Ni glev eo ar c'hreñva eus an dud, hag ez omp deuet da welet anezañ. " — " Ti ar Gouriner? Setu an ti a zo aze dirazoc'h ", eme an den... hag e tiskoueze e di gant an alar dougennet a bouez e zaou zorn, evel ma refec'h gant eur wialenn pe gant ho piz.

An tri glasker o doa komprenet dioustu piou a oa dirazo!

— Ar gigerien a zo paotred ruz o fenn, aer greñv dezo, gouest da zistaga gerioù flemmus ha taolioù trubard... Ac'hanta, eur c'higer bras ha teo a gavas harz e foar Landi diweza. En em gemeret oa ouz " Jakez an Dre ", eur c'hennard a zen, eur bugel da welet e kichen ar c'higer, ...da welet! Setu krog an daou enebour. Paourkêz kiger! Ne voe ket pouner etre divrec'h Jakez. Eur freskad a dapas : teir gwech diouz renk e voe

Gwall'gudenn da Gann al Lonker!

Vann e-vanne a zo deuet da gaout ar medisîn... Hemañ a ra e enklask, gant aked, war gorf Vann, hag en eur echui e lavar dezañ :

— Ha dreist-holl, poanit da eva muioc'h a zour eget a win!

— Penaos? eme Vann. Ar pezh a

lakaet lamm, e ziskoaz war ar bla-senn...

Ar c'horaiz gwechall a oa striz meurbet. Pa veze devez yun, eur pred da greizdeiz, eun all diouz an noz, ha netra ken! Awechou e veze kavet kalët! Bremañ, lezenn an Iiz n'eo mui ken striz... Evit gwir, e Kerwenn ne vank na da zebri na da eva. Zoken, d'ar pardaez, e vezo eur banne hini-kreñv.

Per a laka pep hini en e aes. Servija founnus a ra an dud. E unan, hep lavaret na diskouez, e tale'h mat da c'hiz e yaouankiz : tamm kig ebet epad ar c'horaiz. Evelse eo bet savet, evelse e kendalc'ho betek e varo.

Koulskoude, start eo e binijenn : den ne gav gwelloc'h eur bastell gig eget na ra Per. Farz a zebri evel ar re all, met ne gemer ket a gig. E vere'h a anavez mat e c'hizioù. Klasket he deus displega dezañ : an Iiz a ro aotre da zebri kig; ar c'horaiz a echu hiziken da greisteiz ar zadorn araok Pask : netra da ober! " Betek sul Fask, evel gwechall ", a respont he zad.

Deiz sul Fask avat, abretoc'h c'hoaz eget en devezioù all, Per a vezo war zao. Soaz a oar perak. Lakaet he devezo a gostez evitañ ar c'haera mell-kein, tennet eus ar jarnell, ha poazet en devezioù araok.

Daoust hag an dud n'oant ket ken yac'h en amzer goz, pa raent pini-jenn? Eol! An holl hel lavar... Krenvoc'h oant zoken moarvat, abalamour ma oant furoc'h, sentusoc'h ouz ar gourc'hemennou...

Mikêl a gloz ar varvailhadenn war ar poent-se :

" War fallat e ya an dud, sur! Hervez am eus klevet, abarz fin ar bed, e ranko mont nao den evit diskar eur bod radenn. Gwasoc'h c'hoaz, pa vezo ar bed warnes koueza, e vezo ret teurel evez ha youc'hal : " Tec'hit, tec'hit! "

H. GREFF.



Teñzor an dintin goz

Kendalc'h

Fañchig Kideller a zo deuet gant Laouig ar marichal, bazvalan briedet, betek Maner ar C'head, da c'houlenn da bried Soazig an Togonou, e vuia karet. N'eo ket bet tomman degemer ar zac'h! koulz lavaret...

Pellaet ar vazvalan hag ar c'houeriad diouz Maner-ar-C'head, e lavaras Fañchig, endra-ma valse warlerc'h Laouig ar marichal :

— A'ta, marichal louet, en taol-mañ avat az peus kavet unan da respont ac'ha-nout ! Eur vaouez ! Eur goueriatez c'hoaz ! Kouezet eo bet da veudig en da zornig, ha da glipenn war da glopen, makas tazenn ma 'z out !

— Dre da faot dit-te eo, akre ! borzevellog ! a respontas ar marichal, en eur astenn e gammc'hou.

— Ro peoc'h din, par gaouiad ma 'z out... pe, bremaik, sell ! Ma, n'eus forz penaos, e rankez bremañ, dre gac' pe dre heg, restaol din-me ar pe'z a rois dit evit ober ar gefridi am boa fiziet ennout !

Laouig, kroget aon ennañ, a gemeras eun hent treuz, ar paotr yaouank a gen-dalc'has :

— Va aour ha va are'hant a rankan kaout en dro diganez, Laouig ! Klevet, va c'hlevet a rez ?

— Al labour c'hraet a rank beza pat ! a youc'has ar vazvalan a ziabell.

— Ro da vere'h din da bried, da vere'h pennherez, hag e vezimp kuitet... Unan a zaou ! E pe...

Eur c'hoazadenn c'hoapaüs, lezet gant ar jubennour eus a drañ an dorgenn, a droc'has ar gomz d'ar c'houeriad yaouank. Hemañ a yeas neuze droug ennañ hag a youc'has :

— O ! deus atao, tamm amprevan, m'hen talvezo dit ! Da le'r a baco, akre ! riblaer ma 'z out !

An hekleo a adlavaras komzou gourdrouz Fañchig. Ar bleizi a c'hanas da yudal, hag al loar, al loar arc'hant marvivet, a yeas da guzat a-dreñv eur goumou-lenn-led.

N'edo ket aet an dud c'hoaz d'o gwele e Kervrueg p'en em gavas ar mestr ac'hano er gêr. Hag an dintin goz, kluchet e korn an aoled, da lavaret, dal ma klevas he niz o tont en ti :

— Ac'hanta, labous-noz, ha gwelloc'h out bremañ... goude beza bet o sklasi da fri er menez ?

— An avel yen a lak ar gwad da labourat, moereb ! a respontas ar paotr yaouank. Ha neuze, ne garfec'h ket, tintin Annaig, gwelet ho niz bras o vont d'e wele kerkent ha ma vez net ar yer d'o glud !

— O, deuit atao, va faotr ! Pa viot deuet d'am oad din-me, ez aio ar fringantiz diouzoc'h, kredit ac'hanout !

Eun nebeud miziou a dremenas. Eun abardaez, e kouezas klañv an dintin goz, goude ma oa bet er poull-kanna o vuga an dilhajou. Prestik goude e krogas an derzienn enn, ma-voe dao mont da ger'het ar medisin war he zro e kreiz ar noz, hag ivez ar beleg da rei dezi he sakramañhou diweza araok ar mintin, ken dinerz e koueze ar glañvourez.

Eur pennadig goude ma oa bet nouet, e pedas Fañchig da zont en he c'hichenig. Ar penñher a ziredas raktal, mall gantañ gouzout petra he doa e noun da lavaret dezañ.

E beg eur weznenn ivin e koage eur mellad bran louet, tra ma yude ar c'hi stag, ma kane kilhog bras an ti en eur stlaka eveskell, ha ma wigour ar c'heler-noz e toull ar porrastell. Hag an avel-drañ, o tiskenn eus ar c'hrec'hiennou, a zegase ganti war he askell hekleo kleier ar barrez o seni al lezou.

Julodez vras Kervrueg a oa par d'ar maro pa stoue an niz ouz muzellou disliv e noun evit klevet diganti ar pe'z ne felle dezi aňzav ouz den al ebet nemetañ. Ar glañvourez a anavezaz koulskoude mab he c'hoar hena diouz e vouez. Hag en eur ober eur strivadenn, etre diou ronkadenn, e trailhas eun nebeud geriou, geriou hag o doa, daoust d'ar vouez to'horik o lavaras, penn ha lost, pegwir e teuas ar paotr yaouank a benn da intent ma zilabennou divinatellus-mañ, o tont gant poan eus muzellou an doc'horez : " Mo... ar... di... an ar... an... orn ". (Da gendere'hel) AB. SULIO.

Eur doare talvoudus da zikour ha da studia brezoneg

Ar brezoneg a zo, muioc'h-mui, war spered an holl dud desket. Hep ehan e sav mouezioù da c'houlenn ma vo roet dezañ e blas en arnodennou (examens). Ar C'huzuliou jeneral a ro arc'hant evit kentelia ar brezoneg. A bep tu ec'h en em zifreter, e poanier evitañ...

Ar bruderez-se a zo mat : ret eo ive koulskoude labourat en dounder. Mat eo karet ar brezoneg : e studia a ranker ivez avat.

Ret eo aňzav ne oa c'hoaz levr ebet da gentelia penn-da-benn ar yez : al levriou deuet er maez betek-hen o doa o zalvoudegez, evit loc'hat gant al labour da vihana : hin ebet ne gase da benn.

Savet eo bremañ al levr nevez : paneve m'eo diaes moula en deiz hirio, e vefe deuet er maez pell 'zo. " Yez hon Tadou ", setu ano al levr, savet gant an Aotronez Seite ha Stephan. Ar re-mañ a zo mistri-skol, ampart a bell zo war o micher, hag ive war ar brezoneg.

O levr a vezo eta sklaer, ijinus, aes da gelenn... Ennañ ez eus ive deverioù da ober, pennadoù da lenn tennet eus ar skridoù gwella.

Evelse, eur bugel, dianaoudek eus ar brezoneg, a vezo heñchet en e studi adalek an traou aesa betek ar re galeta, hep poan, hep torr-penn. Ar re a gomz ar brezoneg, zoken an dud vras, a denno o mad eus al levr, evit implij gwelloc'h ar benveg a anavezont dre vras.

" Yez hon Tadou " a vezo ennañ daou levr a 20 kentel, 180 pajenn, daou levr founnnet eta.

Dont a ray er maez eus ar vouterezh hep dale kals. Rakprenet e c'hell beza, ha mat eo hen ober.

Setu amañ ar marc'had evit al levr kenta :

Al levr a vo gwerzet er stalioù	300 lur.
Rakprenet araok an 1 a viz mae, e vo hepken :	250 lur.
Evit 5 skouerenn rakprenet asamblez,	240 lur an niverenn.
— 10	230 lur an niverenn.
Kasit 50 % eus an arc'hant en eur rakprena ; an 50 % all pa vo deuet deoc'h al levriou.	

Implijit, ma karit, evit ho koulenn, ar paper-mañ a zistagot :

A détacher et à retourner au Cercle de Brocéliande, 54, rue Poullain-Duparc, RENNES (1-et-V.).

Je soussigné :

Profession :

Adresse complète :

Je déclare souscrire à exemplaires du 1^{er} tome du livre " Yez hon Tadou " de MM. Seite et Stephan.

J'adresse à votre compte courant postal : Robert AUDIC, Cercle de Brocéliande, 54, rue Poullain-Duparc, Rennes 976-91, la somme de francs, montant égal à 50 % du prix total de la commande. Je m'engage à payer le reste à la réception de exemplaires, ainsi que les frais de port.

Signature :

C'HOARIOU

RESPONT DA C'HOULENNOU MIZ MEURZ

Divinadennoù :

1. - Eun anduilhenn. — 2. - Eun toull.
3. - An al'houez. — 4. - Eur veskenn war ar biz, hag eun nadoz ouz ar veskenn.

	1	2	3	4	5	6	7	8
1	L	A	T	A	R	E	N	N
2	A	H	E	Z			O	A
3	V	E	R	E		N	A	Y
4	A	V	A	N	K	E	Z	
5	R	A			A	I		M
6	O	L	I	V	E	Z		E
7	U	E		L		O	A	D
8	T	D		A	V	U		I

Geriou -Kroaz
al Lagad-du n° 11.

KLASKIT ER MIZ-MAN :

Divinadennoù.

1. — Eun dra a daolan dreist an ti : Pa 'z an d'e glask e kavan tri. — Petra eo? —
2. — Me rank beza krouget uhel, dispak d'ar pevar avel; Neuze, pa vezan lusket, e lakan tud da ziredet. — Petra oun? — 3. — Petra a zeu hag a ya ha da nebl'e'h ne 'z a?

Gerioù-Kroaz al Lagad-du, n° 12.

A-blaen :

1. — Den a vor.
2. — O c'headal. — Lizerennoù ROIN.
3. — Implijet gant eur skolaer evit barn labour e skoliad.
4. — Ennañ e chomit. -- Dreist muzul. -- Penn ar genou.
5. — Dilostger (Suffixe) bihanaat. -- RONSEED dibennet ha dilostet.
6. — Touadenn. — Ster bras Afrika.
7. — Kensonennoù (Consonnes). — Sellet, en amzer da zont.
8. — Ober gouel.

A-zerz :

1. — Gwisket e vezont er goañv.
2. — Marc'hadour louzou (hep T).
3. — Eus ar verb OBER.
4. — Ennañ e vez hadet an avalou-douar. — Notenn.
5. — En unebeud gwez onn.
6. — Plantenn a ro danvez rochedou. — Lakaat da dremen dre eur toullou bihan.
7. — Komzou didalvez.
8. — Krouer pep tra. — A verk al liester (Pluriel).

	1	2	3	4	5	6	7	8
1								
2								
3								
4								
5								
6								
7								
8								

LABOUSED DIAES !

Jobig, 7 vloaz, a vez er skol abalamour m'eo ret, dindan boan a fest ar geuneu-denn... Ne gar ket kals avat terri e benn, hag ar galleg a zo diaes da zeski! Emeur o teski penaos staga ar gerioù an eil ouz egile.

Ar mestr a lavar dezañ konta laboused d'e heul :

- "Quand il y en a un, on dit " ?... — Jobig ne oar ket... — "On dit : un oiseau " !, eme ar mestr. — "Quand il y en a deux, on dit " ?... — "Deux-oiseaux " ! eme Jobig. — "Non ! Deux-z-oiseaux " ! — "Pour trois " ? — Trois-z-oiseaux !

— Très bien, Jobig ! — "Pour quatre " ? — "Quatre-z-oiseaux " , eme Jobig, barrek gonde ar gavadenn araok...

— "Mais non, voyons ! Quatr' oiseaux ! — "Et pour cinq " ? — Jobig a skrab e benn hag a lueh en er... "Cinq-tr-oiseaux " ... — Faites donc attention ! On dit : "Cinq-k-oiseaux " .

Et pour six ? — "Ben... six-k-oiseaux " ,...

Ar mestr a daol e levr ouz penn Jobig. Droug ennañ, Jobig a c'hrosmol : "Da zutal gant da laboused ! Va re-me a zo aesoc'h ! Eul labous, daou labous, tri labous, pevar labous, pemp labous, c'houec'h labous " ...

AU MEUBLIER D'ART Ty-Breiz

René CREACH'CADIC

21, Avenue de la Gare, QUIMPER

Téléphone 4-83

Son Musée d'Art Breton

Ses Intérieurs Anciens

Installations de Magasins

Aménagements de Cafés

et de Bars Américains

FILET BLEU
BISCUITS FAMEUX
QUIMPER

CAMIONNAGE
DÉMÉNAGEMENTS

GARDE-MEUBLES

L. Tanguy
Quimper

LA COOPÉRATIVE FORESTIÈRE

BOIS DE CHAUFFAGE

GAZO-BOIS

ACHATS — VENTES

8, Place Saint-Michel, SAINT-BRIEUC

Siege Central : 34, Place des Lices, RENNES

Téléphone 55-75

TI ar GLOAN

9, Stræd ar C'higereziou, KEMPER

Gloanajou digemmesk

eus an oll ardameziou

E. BEGOT
SOUFREREZ KERNE

13, Stræd Jean-Jaures, KEMPER

Téléph. 9-33

E vez dresel adleuzet evit ar gwella goloioù-kaoutchoug ar rodou

Gwerz a c'holoioù a bep ment — Labour vat, graet hep dale

"AGA"

Véritable Cuisinière à feu continu

"UNIQUE AU MONDE"

MODÈLES POUR PENSIONNATS
COMMUNAUTÉS, FERMES, etc...

Concessionnaire :

LECERF, 8, Rue Kerfenteun, QUIMPER — Téléph. 8-88

ART SACRÉ

ORFÈVRE
BRONZES
STATUAIRE
CHASUBLERIE

Pierre PÊCHE

14, Boulevard de Kerguelen
QUIMPER (Finistère).

Téléphone 8-10

LUNETTERIE — ORTHOPÉDIE

Diplômé
de l'Ecole
Nationale
d'Optique

DELBENN

Diplômé
de l'Ecole
Française
d'Orthopédie

16, Rue Kéréon. — QUIMPER

LE BIHAN-SALUDEN


7, Rue Kergariou
QUIMPER

VITRAUX

PAPIERS D'EMBALLAGE EN TOUS GENRES
SACS ET NAPPES EN PAPIER, FICELLES

Jean PAYAN

Dépôt : 54, Quai de l'Odéon
QUIMPER Tél. 12-88



TOUTES CARROSSERIES
INDUSTRIELLES & COMMERCIALES
"Métallique et Alliage Léger"

TUAL

TREDION
(MORBIHAN)

TÉLÉPHONE : 6

"A SAINT JOSEPH"

325, Rue Léon-Gambetta. — LILLE (Nord)

J. GORRISSEN, Tailleur diplômé

Toutes spécialités pour MM. les Ecclésiastiques

SOUTANES, PÉLERINES, MANTEAUX ROMAINS, etc...

BAS pure laine très solides : 350 francs

TRAVAIL SOIGNÉ — PRIX MODÉRÉS

Dans un cadre agréable...

Une table de choix...

Une cave renommée...

Restaurant GIRAudeau

(BAR PARISIEN)

13, Rue Jean-Jaurès, QUIMPER

Brezonég en ti

QUIMPER FAIENCERIE QUIMPER
HENRIOT

TECHNIC - RADIO

ETABLISSEMENTS MICHEL CARIOU

15, Rue J.-J. Rousseau — PONT-L'ABBÉ

Toute la Radio

Téléphone 114

HIENT AIR GROAZ


E gwask an ehanou :

Doun em c'halon, O Mamm zantel,
louc'h gloaziou da Vab o vervel!

Ehan kenta.

- I. Jezuz fals-tamallet!... barnet!
Setu frouez euzus va fec'hed.
- II. Bez' e sammer war e ziskoaz
Koadach hir ha pounner ar groaz.
- III. Jezuz evit ar genta gwez (gwech)
dindan re vec'h lazus a gouez.
- IV. Eur rann-galon dezañ, pa wel
o vont ebious e Vamm zantel.
- V. Simon Gurenat a c'halver
'vit kendougen Kroaz ar Zalver.
- VI. Veronika, ar vaouez vat,
a zec'h diwar e zremm ar gwad.
- VII. Jezuz amañ 'vit an eil gwez
dindan re vec'h lazus a gouez.
- VIII. Ragwel dismantradeg ar Vro,
d'ar Gwraze santel taol garo!
- IX. Jezuz evit an drede gwez
dindan re vec'h lazus a gouez.
- X. En o gwas war ar C'halvar,
malloz!... Goaperez!... Reuz!... Glac'har!
- XI. Gant tachou 'n e bevar ezel
Kroastaget Jezuz da vervel!
- XII. Neñv ha douar, leñvit c'houero,
Jezuz war ar groaz zo maro.
- XIII. E gorf maro digroastaget
d'e Vamm santel zo daskoret.
- XIV. E doun eur roc'h, klozet er bez...
Ac'hano 'savo d'ar vuhez.

Frañsez VALLEE.



REGINA CÆLI

Pebeuz joa deoc'h-hu, Gwerc'hez Vari,
Alleluia, o pebeuz lid dimp-ni :
Hervez e c'her, setu m'eo dasorc'het
E gwirionez, ar Mab hoc'h eus douget.

Santez Vari, grit ma c'hellimp gantañ
Eus ar pec'hed dasorc'hi a-vremañ :
Pedit 'vidomp ma c'hellimp holl ivez
Kerzout pelloc'h en eur vuhez nevez.

Maodez GLANNDOUR.